

- 107 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

39. MORISET IANN SKOLAN

° E korn ar follenn e
lennner : Melrand

Gouelomp, gouelomp na gant galc'har
 kemend den ° zo war ann douar °a-us : a
 enn eur glevet eur seurt torfed
 Krena 'rann oc'h he lavaret.
 ebarz er Merant tremenet
 e ze eur gwall-eur erruet
 greet gant eur c'hoz ° tamm kemener °a-us: lakez
 enn andred eur plac'h euz a ger.
 Daou vloaz hanter ez oa bet
 o klask he dougen d'ar pec'hed.
 ar plac'h he doa doujanz Doue
 hag aoun da zaoni he ene.
 Eunn deiz ne zonje nemet mad
 enn eur ziwall°loened he zad °a-is : /p'edo o tiwall/
 pa zigwez ann den fallakr-man
 eur c'hrok poezer a oa gant han.
 hag hen mont ha laret d'ezhi :
 - Bremaik avad ec'h aotrei
 bremaik avad te a aotreo
 pe ma ne rez ket me da lazo.
 ar plac'h paour-man pa her c'hlevaz
 o welet oa enn danjer braz
 a bedaz ar Werc'hez Vari
 da veza avokadez evit-hi.
 - Gwerc'hez dreist ann holl gwerc'hezed,
 n'am dilezit ket, me ho ped.
 gwell eo gan-en beza lazeta
 evit ober drouk na pec'hed.
 hag hen kregi 'nn he groumelen
 Skei ganthi diwar greiz he fenn.
 ann trede taol d'ezhi a roaz
 diwar boull he c'haloun e skoaz
 /hag enn/° he goad /holl/ he beuzaz°° °a-is : gant
 etre unneg heur ha kreiz de °°a-is: he sklabezaz
 he zad er gear a zigweze
 a gav he c'hrek, he vugale
 e glac'har, e tristidige.
 - Va bugale, din leveret
 perak ez oc'h-hu glac'haret ?
 - Va zad, abred awalc'h klefet

- 108 -

Siouaz ! maro eo Moriset.
 Morised a zo enn hent braz
 enn eur poull goad hag hi ienn sklaz
 ann ozac'h ° pa glevaz
 war al leur-zi eno 'gouezaz,
 da gaout he verc'h goude 'ieaz.
 - harz war ar muntreer milliget
 harz war ar muntreer kounnaret
 petra deuz gret va merc'h did-te
 evit ° d'he laza er c'hiz-se ?
 Kris 'vije 'r galoun na ouelje
 e parez Merand neb a vije
 o welet 'r goad 'tont euz ar c'har
 pa gaset Moriset d'ann douar.
 eur groaz zo savet war he bez
 da ziskouez eo maro gwe(r)c'hez
 eunn all e leac'h moa bet lazeta
 evit beza skouer dar merc'hed.
 Kemeromp eta skouer diout-hi
 evit beza hevel out-hi.
 hag evel-d-hi vimp kurunet
 er baradoz gant anh dreinded.
 gwer(z) Moriset eo houman
 da neb he goar da gana !

°a-us : na

°a-us : dout

vvvvvvv